

ESPACE  
LEURENN

# GLEN MOR



SAISON  
CULTURELLE  
2025 - 2026

KOULZAD  
SEVENADUREL  
2025 - 2026

**CARHAIX  
KARAEZ**

VENDREDI 3 OCTOBRE  
GWENER 3 A VIZ HERE

**ALTAN**

20H30 / 8E30  
AMPHI / AÑFI



## MUSIQUE FOLK IRLANDAISE

Fondé à la fin des années 80 dans le sillage des Clancy Brothers, Chieftains et autres Dubliners, Altan a publié une dizaine d'albums et visité nombre de pays du monde. Ce groupe réunit quatre musiciens accomplis autour de la belle voix de Mairéad Ní Mhaonaigh qui s'exprime en anglais et en gaélique, langue qui conserve nombre de (d'innombrables) trésors du patrimoine traditionnel chanté. Ce groupe tisse un répertoire de balades, de jigs et de reels animés, hérité du Donegal, comté encore sauvage, situé au nord-ouest de l'Irlande, ainsi que du nord du pays, régions dont la plupart des membres du groupe sont originaires.

Altan demeure aujourd'hui « l'étalon or de la musique traditionnelle irlandaise » - Irish Echo.

Chant / violon : Mairéad Ní Mhaonaigh  
Accordéon : Martin Tourish  
Chant / violon : Clare Friel  
Bouzouki : Ciaran Curran  
Guitare : Mark Kelly  
Album Donegal (Compass Records)

Tout public  
Durée : 1h30

TE: 10 € / TA: 15 € /  
TR: 18 € / TP: 22 €

[www.facebook.com/altanofficial](http://www.facebook.com/altanofficial)

## SONEREZH FOLK IWERZHON

Savet e oa bet ar strollad e dibenn ar bloavezhioù 80 war roudoù ar strolladoù Clancy Brothers, Chieftains, Dubliners ha kement zo. Gant Altan ez eus bet embannet un dek albom bennak ha gweladennet meur a vro er bed a-bezh. Er strollad ez eus pevar soner barrek bodet tro-dro da vouezh kaer Mairéad Ní Mhaonaigh, a ra gant ar saozneg hag ar gouezeleg, ur yezh hag a zo enni teñzoríoù a-leizh eus ar glad hengounel kanet. Sonet e vez tonioù evit balladennoù, jig ha reel entanet, eus an Donegal, ur gontelezh ouez c'hoazh e gwalarn Iwerzhon, hag eus norzh ar vro, pa zeu an darn vras eus sonerien ar strollad eus ar c'horn-bro-se.

Hiziv an deiz c'hoazh eo Altan « ur skouer aour eus sonerezh hengounel Iwerzhon » - Irish Echo.

Kan / biolin : Mairéad Ní Mhaonaigh  
Akordeoñs : Martin Tourish  
Kan / biolin : Clare Friel  
Bouzouki : Ciaran Curran  
Gitar : Mark Kelly  
Album Donegal (Compass Records)

Evit an holl  
Pad : 1e30

PB: 10 € / PK: 15 € /  
PD: 18 € / PL: 22 €

DIMANCHE 5 OCTOBRE  
SUL 5 A VIZ HERE

**LE PETIT THÉÂTRE  
AR C'HOARIVA BIHAN**  
COLLECTIF AUTRE DIRECTION  
STROLLAD AUTRE DIRECTION

15H00 / 3E00  
AMPHI / ANFI



© Eric Leroux

## THÉÂTRE FORAIN

À l'instar des vieux cirques, Misère, Prospérus et le petit Mimosa sillonnent le monde en quête de l'endroit où monter leur petit théâtre. Les aventures qu'ils rencontrent en chemin sont librement inspirées de faits réels aussi divertissants que véridiques !

Écriture, jeu et mise en scène :  
Thomas Feuillet - Malika Gromy  
Musique : Malika Gromy  
Scénographie, marionnettes et objets de spectacle :  
Thomas Feuillet  
Création lumière : Sébastien Bonichon/Collectif Autre  
Direction

Coréalisation Espace Glenmor, Échanges & Cie.  
Tout public  
Durée : 45 minutes.  
Ce spectacle n'est pas inclus dans  
notre formule d'abonnement.

TU: 1€

[www.autredirection.com](http://www.autredirection.com)

## C'HOARIVA FORAN

Evel ar sirkoù gwechall emañ Misère, Prospérus ha Mimosa bihan o foetañ hent dre ar bed evit kavout ul lec'h da sevel o c'hoariva bihan. An traoù-kaer a ve vont war an hent zo traoù zo savet diwar traoù hag a zo c'hoarvezet e gwirionez, ken plijus ha m'int gwir !

Skritur, c'hoari ha leurenañ :  
Thomas Feuillet - Malika Gromy  
Sonerezh : Malika Gromy  
Leurenaozañ, margodennoù ha bitrakoù an arvest :  
Thomas Feuillet  
Krouiñ ar gouleier : Sébastien Bonichon/  
Kenstroll Autre Direction


Kensevenet gant al Leurenn Glenmor, Échanges & Cie.  
Evit an holl  
Pad : 45 munut.  
N'emañ ket an arvest-mañ e-barzh  
hor formulenn goumanantiñ.

PU: 1€

DIMANCHE 12 OCTOBRE  
SUL 12 A VIZ HERE

## ARTHUR H & PIERRE LE BOURGEOIS

17H30 / 5E30  
AMPHI / ANFI



© Valentin Folliet

### CHANSON AVENTUREUSE

Deux musiciens sur scène, piano et violoncelle. Pierre musicien inventif, surprenant, libre : il peut caresser son instrument, lyrique et doux, et il peut le malmener, sauvage et chaotique. Arthur au piano, aux claviers, guitare, au chant, à la poésie et à la transe.

Entre acoustique et technologie, les deux musiciens vont tenter d'inventer une musique créative en direct tout en réinventant ses classiques. D'abord le son acoustique ancien classique, connu, chaud, puis le traitement à l'infini par les nouvelles technologies. Pierre sample, boucle, triture, transforme. Arthur modifie, ouvre, élargit. Toujours dans un esprit low-tech, à la Méliès, tout se voit et tout s'invente sur le moment, le geste est musical, l'analogique est le futur. Pour raconter des histoires d'aujourd'hui, pour que la technologie ne nous transforme pas en robot. L'humain qui commande la machine et pas l'inverse. Dans la spontanéité, dans l'instant, il y a le libre, la suspension du temps, l'écoute. Et le jeu, le plaisir de s'aventurer dans le jeu, la joie de l'énergie.

Chant / Piano : Arthur H  
Violoncelle / Programmation : Pierre Le Bourgeois

Tout public  
Durée : 1h30

TE: 25 € / TA: 30 € /  
TR: 33 € / TP: 35 €

[www.arthur-h.net](http://www.arthur-h.net)

PB: 25 € / PK: 30 € /  
PD: 33 € / PL: 35 €

### KANAOUENNOÙ AVANTURUS

Daou soner war al leurenn, piano ha violoñsel.  
Pierre, soner, ijin gantañ, dic'hortoz, frank : flourañ a ra e venveg, barzhel ha dous, ha gwallgas anezhañ kerkoulz all, gouez ha diroll. Arthur ouzh ar piano, ar c'hlavieroù, ar gitar, ar c'han, ouzh ar varzhoniezh hag an treant.

Gant sonerezh klevedoniel koulz ha teknologel e klask an daou soner ijinañ sonerezh krouiñ war-eeun, ha nevesaat o zonioù brudet war an dro. Da gantañ emañ ar son klevedoniel, a anavez, tomm, ha goude-se an doareoù a bep seurt d'ober gantañ gant an teknologiezhioù nevez. Pierre a vez o standilhonañ, o rodellat, o valañ, o treuzfurmiñ ar sonioù. Hag Arthur o kemmañ, o tigeriñ, o ledanaat. Gant ur spered low-tech bepred, evel Méliès, e vez graet hag ijinet pep tra a-wel d'an holl, war an tomm, ar jestroù zo sonerezh, analogel eo an amzer da zont. Evit kontañ istorioù a vremañ, kuit deomp da vont da roboted abalamour d'an deknologiezh. An den a ro urzhioù d'ar benveg ha neket ar c'hontrefed. War ar prim, war an tomm, emañ ar frankiz, an amzer a-ispilh, evit selaou. Hag ar c'hoari, ar blijadur o klask modoù da seniñ, levez en energiezh.

Kan / Piano : Arthur H  
Vioñsel / Programmatur : Pierre Le Bourgeois

Evit an holl  
Pad : 1e30

SAMEDI 18 OCTOBRE  
SADORN 18 A VIZ HERE

## LA SURADA

20H30 / 8E30  
AMPHI / ANFI



## MUSIQUES DE VERACRUZ

La Surada souffle le vent chaud du sud du Mexique et compte parmi les premiers groupes de femmes instrumentistes dans cette musique qu'est le «Son Jarocho» de Veracruz.

Si la pratique a été longtemps réservée aux hommes, les musiciennes s'en sont aujourd'hui emparées, à l'instar de ces chanteuses et instrumentistes de talent : Sirani Guevarra (guitare media, jarana, zapateado, voix), Eréndira Blanco Vargas (jarana tercera, voix), Guadalupe Santiago (requinto, voix), Patricia Barradas (jarana, zapateado, voix), Charlotte Espieussas (accordéon, percussions, voix). Les musiciennes bousculent les codes, s'approprient les textes, écrivent des paroles engagées, souvent féministes, défendent une autre vision de cette musique, résolument ouverte à tous(tes).

Leurs voix puissantes dessinent la beauté des paysages du Sotavento, le chant des oiseaux, la nature débordante, les histoires d'amour et de désamour, la brujeria et les mythes, mais aussi parfois les luttes. La poésie chantée est déclamée à pleins poumons, sous forme de chant à répondre, et la rythmique ternaire des cordes et percussions portent en elles les racines métisses de cette musique européenne (baroque, hispanique), africaine, et indigène.

Coréalisation Espace Glenmor, Le Plancher.

Tout public

Durée : 1h15

TE: 8 € / TA: 10 € /  
TR: 13 € / TP: 15 €

## SONEREZH EUS VERACRUZ

Gant La Surada e vez c'hwezhet avel domm su Mec'hiko. Emañ ar strollad e-mesk ar re gentañ enno sonerezed hepken o seniñ « Son Jarocho », ar sonerezh eus Veracruz.

E-pad pell ne veze sonet nemet gant paotred, ha hiziv an deiz en em gav sonerezed ivez, evel ar c'hanerezed ha sonerezed barrek-mañ : Sirani Guevarra (gitar media, jarana, zapateado, mouezh), Eréndira Blanco Vargas (jarana tercera, mouezh), Guadalupe Santiago (requinto, mouezh), Patricia Barradas (jarana, zapateado, mouezh), Charlotte Espieussas (akordeoñs, binvioù tos, mouezh). Gant ar sonerezed e vez torret ar gizioù, perc'hennet an testennoù, skrivañ a reont komzoù engouestlet, benelour alies-mat, diskouez a reont ur sell all war ar sonerezh-se, digor d'an holl da vat.

Gant o mouezhioù kreñv e vez treset kened ar gweledvaoù e Sotavento, kan al laboused, an natur struzhus, istorioù karantez ha digarantez, brujeria ha mojennoù, hag ar stourmoù ivez a-wechoù. Ar varzhoniezh kanet a vez dispaket a-bouez-penn, e doare kan ha diskan, hag adkavout a reer gwiziennoù kemmesket ar sonerezh-se e luskoù triel ar binvioù kerdin ha tos : Europa (barok, giz Spagn), Afrika hag indigena.

Kensevenet gant al Leurenn Glenmor ha Le Plancher.

Evit an holl

Pad : 1e15

PB: 8 € / PK: 10 € /  
PD: 13 € / PL: 15 €

SAMEDI 25 & DIMANCHE 26 OCTOBRE  
SADORN 25 HA SUL 26 A VIZ HERE

## 36<sup>E</sup> FESTIVAL DU LIVRE EN BRETAGNE 36<sup>VET</sup> FESTIVAL AL LEVRIÒU E BREIZH

10H00-19H00 / 10E00-7E00



Rendez-vous incontournable pour celles et ceux qui aiment les livres, le festival du livre de Carhaix est un événement unique en Bretagne. Il permet en effet, le temps d'un week-end, de rassembler une large majorité des maisons d'édition du pays, (environ une centaine) qu'elles éditent en langue française ou en breton. Près de 300 auteurs, des plus connus aux anonymes, sont présents sur les différents stands. Chaque année, des éditeurs calent la sortie de leurs principaux ouvrages sur la date du festival faisant de Carhaix le lieu de la rentrée littéraire en Bretagne.

Après avoir ouvert, ces dernières années, ses portes et ses fenêtres sur l'Ecosse, la Catalogne, la Corse... le festival aura pour thème cette année la Kabylie, et sera présidé par Ferhat Mehenni (homme politique, écrivain et auteur-compositeur-interprète kabyle).

Comme chaque année, le festival proposera des débats, des tables rondes, des expos, des films... des rencontres toujours riches d'enseignements avec les éditeurs, des moments inoubliables autour du livre et de la lecture. Un espace ludique pour les enfants est proposé aux parents. Il est possible de se restaurer sur place. Bref, deux jours non-stop dans l'univers des livres édités en Bretagne. Une découverte et une surprise pour beaucoup face à la diversité et à la richesse éditoriale de notre pays.

Organisation : Centre culturel breton Egin.

GRATUIT

[www.festivaldulivre-carhaix.bzh](http://www.festivaldulivre-carhaix.bzh)

Gouel al levrioù e Breizh zo deuet da vezañ, a-hed ar bloavezhioù, un emgav ha ne c'haller ket c'hwitañ evit ar re a blij al levrioù dezho. Rak gallout a reer degemer ennañ, e-pad un dibenn-sizhun, ar braz eus an tiez-embann er vro (ur c'hant bennak anezho), pe ez embannfent levrioù gallek pe levrioù brezhonek. Tost da 300 skrivagner, eus ar re anavezet ar muiañ betek ar re dianav, a vo ivez er standoù a bep seurt. Bep bloaz e vez embannerien oc'h ober e doare ma teuy o oberennoù pennañ er-maez da-geñver ar gouel a laka Karaez da vezañ al lec'h ma tegouezh mare al levrioù e Breizh.

Goude bezañ digoret e zorioù hag e brenestroù er bloavezhioù diwezhañ war Skos, Katalonia, Korsika... e vo Kabilia an tem er bloaz-mañ, gant Ferhat Mehenni da brezidant (politikour, skrivagner hag aozer-sonaozer-kaner e kabileg).

Evel bep bloaz e vo kaozeadennoù, taolioù-krenn, diskouezadegoù, filmoù... emgavioù gant ar skrivagnerien, mareoù diankounac'haus ma vez desket kalz a draoù diwar-benn al levrioù hag al lenn. Ul lec'h c'hoarioù a vo kinniget evit ar vugale. Debriñ war al lec'h a c'haller ober. E berr gomzoù, daou zevezh dibaouez e bed al levrioù embannet e Breizh. Digarez d'ober anaoudegezh gant traoù a-leizh ha da lakaat kalz a dud da vezañ souezhet dirak al levrioù liesseurt ha puilh a vez embannet en hor bro!

Aozet gant : Kreizenn sevenadurel vreizhat Egin.

DIGOUST

VENDREDI 28 NOVEMBRE  
GWENER 28 A VIZ DU

## AÏELO + LIZA MAUZOLE

21H00 / 9E00  
KLUB / KLUB



### MUSIQUE FOLK INTIMISTE

Aïelo réunit deux femmes complices. Armées de leurs voix envoûtantes et de leurs guitares, elles interprètent aussi bien des reprises que leurs propres compositions. Leurs performances sont marquées par une authenticité et une sensibilité qui captivent leur audience, offrant un voyage musical intime et émouvant. Avec Aïelo, chaque morceau devient une histoire à part entière, portée par deux voix qui se complètent et s'enrichissent mutuellement, créant une expérience sonore unique et inoubliable.

Guitariste de formation au conservatoire, Liza Mauzole s'est passionnée pour la musique dès l'enfance, explorant également le chant. Son univers musical, marqué par des influences telles que Stevie Wonder et des sonorités plus rock, s'est développé au fil des années. Depuis 2015, elle crée ses propres morceaux, mêlant anglais et français dans ses textes. Avec sa guitare, son looper et sa voix à la fois douce et puissante, Liza évolue dans un univers où se croisent folk et neo soul. Son art, nourri par les émotions captées dans les mélodies, offre un univers aussi riche que vibrant. Elle a récemment assuré les premières parties de Peter Doherty ou Manu Chao, et s'est également produite l'été dernier au festival « Les petites folies ».

Coréalisation Espace Glenmor, CLAJ.  
Tout public.  
Durée : 2h.  
Ces spectacles ne sont pas inclus dans  
notre formule d'abonnement.

TU : 8€  
CONCERTS  
DEBOUT

### SONEREZH FOLK NES

Gant Aïelo en em gav div vaouez, kamaladezed anezho. Pep a vouezh varzhus hag a c'hitar ganto e kanont tonioù adkemeret digant tud all koulz ha tonioù savet ganto. Gwirion ha tener e vez o abadennoù, sachet e vez evezh an dud ha roet dezho da glevet ur veaj sonerezh nes ha fromus. Gant Aïelo ez a pep ton d'un istor da vat, gant div vouezh a gloka hag a binvidika an eil hag eben, evit krouiñ un abadenn sonerezh dibar ha ne c'haller ket ankouaat.

Liza Mauzole zo bet stummet evel gitarourez er skol sonerezh. Abaoe m'eo bugel e plij ar sonerezh dezhi, hag aet eo war-zu ar c'han ivez. A-hed ar bloavezhioù he deus savet he bed sonerezh dezhi, gant levezon Stevie Wonder da skouer ha sonerezhioù troet war ar rock. Abaoe 2015 e skriv he zonioù, gant testennoù mesket saozneg ha galleg enno. Gant he gitar, he looper hag he mouezh dous ha nerzhus war un dro emañ Liza en ur bed etre folk ha soul mod nevez. Hec'h arz, maget gant fromoù taolet gant an tonioù, a ro deomp da glevet ur bed puilh ha trivilius. Nevez zo e oa bet o seniñ ragabadennoù sonadegoù Pete Doherty ha Manu Chao, ha war leurenn ar festival « Les petites folies » e oa en hañv tremenet ivez.

Kensevenet gant al Leurenn Glenmor hag an SDAY.  
Evit an holl.  
Pad : 2e.  
N'emañ ket an arvestoù-mañ e-barzh  
hor formulenn goumanantiñ.

<https://quincailleriemusicale.com>

[www.facebook.com/Lizzahe](https://www.facebook.com/Lizzahe)

PU : 8€  
SONADEG  
WAR-SAV



DIMANCHE 30 NOVEMBRE  
SUL 30 A VIZ DU

**ORCHESTRE NATIONAL  
DE BRETAGNE :  
FOLKLORES DU NORD  
LAZ-SENIÑ BROADEL  
BREIZH : FOLKLOR  
AN NORZH**

17H00 / 5E00  
AMPHI / AÑFI



© Laurent Guizard

© Laurent Guizard

<https://orchestrenationaldebretagne.bzh>

## MUSIQUES D'INSPIRATION CELTE ET TRADITIONNELLES

Nicolas Ellis reprend le flambeau du projet de l'ONB en mettant à l'honneur les musiques d'inspiration celte et traditionnelles du monde, accompagné de deux musiciens québécois. Les émigrés bretons, irlandais et écossais ont, en effet, laissé une empreinte marquante sur la musique de la Belle Province. Avec Alexis Chartrand et Nicolas Babineau, l'Orchestre National de Bretagne interprétera des Airs de danses traditionnelles du Québec pour violoneux et orchestre à cordes, une commande de l'Orchestre de l'Agora.

Préparez-vous à découvrir des chants de travail, des refrains marins, des danses joyeuses, et peut-être même une gigue irlandaise ou un andro breton ! De plus, Nicolas Ellis, vous proposera une exploration d'autres cultures du Nord à travers des œuvres polonaises, scandinaves et du grand Nord canadien, tissant des liens entre nos magnifiques régions. Un concert audacieux et unique, à ne pas manquer !

Nicolas Ellis - Direction musicale  
Alexis Chartrand - Violon  
Nicolas Babineau - Violon

L'Orchestre National de Bretagne est financé par la Région Bretagne, le Ministère de la Culture - DRAC Bretagne, la Ville de Rennes, le Conseil Départemental d'Ille-et-Vilaine, avec le soutien du Conseil Départemental du Morbihan et de Rennes Métropole.

Tout public.  
Durée : 2h.

TE: 10 € / TA: 15 € /  
TR: 20 € / TP: 22 €

## SONEREZH DIWAR LEVEZONOÙ KELTIEK HAG HENGOUNEL

Delc'hen a ra Nicolas Ellis gant an hent boulc'het gant Laz-seniñ Broadel Breizh o reiñ enor d'ar sonerezh eus ar bed deuet diwar levezonoù keltiek hag hengounel, asambles gant daou soner eus Kebek. An divroidi eus Breizh, Iwerzhon ha Skos o deus lezet ur merk war ar sonerezh e Kebek. Asambles gant Alexis Chartrand ha Nicolas Babineau e sono Laz-seniñ Broadel Breizh tonioù hengounel da zañsal eus Kebek evit sonerien biolin ha lazoù-seniñ kerdin, war goulenn Laz-seniñ an Agora.

Klevet a reoc'h kanoù labour, diskanoù martoloded, dañsoù laouen ha marteze a-walc'h ur jig iwerzhonat pe un andro breton zoken ! Kinniget e vo ivez gant Nicola Ellis ober anaoudegezh gant sevenadurioù all eus an Norzh gant oberennoù polonat, skandinavat hag eus Norzh Kanada, evit skoulmañ liammoù etre hor c'hornioù-bro kaer. Ur sonadeg er penn a-raok ha dibar war un dro ha ne c'haller ket c'hwitañ !

Nicolas Ellis - Renerezh sonerezh  
Alexis Chartrand - Biolin  
Nicolas Babineau - Biolin

Arc'hantaouet e vez Laz-seniñ Broadel Breizh gant Rannvro Breizh, Ministrerezh ar Sevenadur - RRAS Breizh, Ti-kêr Roazhon, Kuzul-departamant an Il-ha-Gwilen, ha skoazellet e vez gant Kuzul-departamant ar Mor-Bihan ha Meurgêr Roazhon.


Evit an holl.  
Pad : 2e.

PB: 10 € / PK: 15 € /  
PD: 20 € / PL: 22 €

SAMEDI 6 &  
DIMANCHE 7 DECEMBRE  
SADORN 6 HA  
SUL 7 A VIZ KERZU

## LES FEST'HIVERNALES AR FESTIVA'R GOAÑV

10H00-19H00 / 10E00-7E00  
SALLE J. MARTRAY / SAL J. MARTRAY



Les Fest'Hivernales : 2 journées festives et conviviales avec tout un tas d'animations pour les petits et les grands : un marché de Noël mettant à l'honneur l'artisanat local et les produits biologiques, des spectacles, des jeux, des animations, une tombola, des conférences et des films - en partenariat avec l'association Contrechamp. Un programme riche pour célébrer l'hiver ensemble ! Clou du festival, le Père Noël sera présent parmi nous le dimanche après-midi pour une séance photo en famille. Vous pourrez vous restaurer sur place avec des repas cuisinés et 100% bio les deux jours, ainsi que boire un vin chaud pour le petit réconfort hivernal.

Organisation : Kuzul Skoazell Diwan Karaez

2 €  
GRATUIT  
POUR LES -10 ANS

Ar Festiva'r Goañv : 2 zevezh ma vo kinniget abadennoù evit ar re vihan hag evit ar re vras : ur marc'had Nedeleg ma vo enoret artizanerezh ar vro hag ar produioù biologieg, arvestoù, c'hoarioù, abadennoù, un tombola, prezegennoù ha filmoù aozet asambles gant ar gevredigezh Contrechamps. Ur programm puilh a vo evit lidañ ar goañv asambles ! Ar pep kaerañ eus ar jeu, Tad-kozh an Nedeleg, a vo war al lec'h d'ar Sul goude merenn evit un abadenn ma c'hallo ar familhoù pozifiñ gantañ. E-kerzh an daou zevezh-se e c'halloc'h debriñ war al lec'h predoù keginet ha 100% bio, hag evañ ur bannac'h gwin tomm hag a zegaso un tamm frealz deoc'h er goañv.

Aozet gant : Kuzul Skoazell Diwan Karaez

2 €  
DIGOUST EVIT  
AR VUGALE - 10 VLOAZ

[www.facebook.com/festhivernales](http://www.facebook.com/festhivernales)

JEUDI 11 DÉCEMBRE &  
VENDREDI 12 DÉCEMBRE  
YAOU 11 A VIZ KERZU HA  
GWENER 12 A VIZ KERZU

## LES KUIZINÉES CIE. AMÉNOTE

10H00 & 14h30 / 10E00 HA 2E30  
AMPHI / ANFI



## RECETTES MUSICALES CONTÉES

Une petite fille raconte ses souvenirs, ses découvertes et les échappatoires de sa grand-mère, femme au foyer des années 50 pour fausser compagnie à la routine. Sa recette à elle : faire de la cuisine avec des sons. Quels ingrédients mélanger pour en faire un morceau musical ? Que racontent les casseroles si on prend le temps de les écouter ? Construits à partir d'objets de récupération, les espaces scénographiques correspondent à un univers musical et sonore mélangeant des sons d'objets avec des instruments de lutherie dits traditionnels (cuatro et flûte), des mots, des chansons et de la musique électronique.

Voix, flûte, percussions, MAO : Marie Lafond  
Cuatro vénézuélien, voix, percussions : Manon Courtin  
Direction artistique, écriture, composition, arrangement : Marie Lafond  
Mise en scène : Pierre-Alfred Eberhard  
Décor, scénographie : Marie Lafond, Doriane Ayxandri  
Technique lumière : Sophie Moreau  
Technique son : Yann Leroux  
Instrumentarium : Marie Lafond

Dès 3 ans.  
Durée : 40 min

SÉANCES SCOLAIRES :  
SE RENSEIGNER  
AUPRÈS DE NOTRE  
SECRETARIAT

## REKIPEOÙ SONEREZH KONTET

Kontañ a ra ur plac'hig hec'h eñvorennoù, he c'havadennoù hag achapadennoù he mamm-gozh, ur vaouez er gêr er bloavezhioù 50, evit tec'hel diouzh ar vuhez pemdez. He rekiye dezhi : keginañ gant sonioù. Peseurt aozennoù meskañ evit fardañ un ton ? Petra a vez kontet gant ar c'hastelodennoù pa gemerer an amzer da selaou anezho ? Diwar dafar adaozet ez eus bet savet lec'hioù war al leurenn hag a grou ur bed sonerezh ha sonioù, mesket ennañ sonioù bitrakoù koulz ha binvioù luderezh hengounel (cuatro ha fleüt), gerioù, kanaouennoù ha sonerezh elektronek.

Mouezh, fleüt, toumperezh, SAU : Marie Lafond  
Cuatro eus Venezuela, mouezh, binvioù tos : Manon Courtin  
Renerezh arzel, skritur, aozañ, kempenn : Marie Lafond  
Leurennañ : Pierre-Alfred Eberhard  
Kinkladurioù, leurrenaozañ : Marie Lafond, Doriane Ayxandri  
Teknik gouleier : Sophie Moreau  
Teknik son : Yann Leroux  
Instrumentarium : Marie Lafond.

Adalek 3 bloaz.  
Pad : 40 mn

ABADENNOÙ  
EVIT AR SKOLIDI :  
GOULENN GANT HOR  
SEKRETOURIEZH

SAMEDI 13 DÉCEMBRE  
SADORN 13 A VIZ KERZU

**ALLEZ ÇA PART**  
GROOVE CREW

16H00 / 4E00  
AMPHI / ANFI



**SPECTACLE DE DIABOLO  
CHORÉGRAPHIQUE, ACROBATIQUE  
& BURLESQUE**

« Allez ça part ! » se définit par des inspirations multiculturelles et une recherche visuelle innovante où se mélangent le diabolo, l'acrobatie, le Hip-Hop et la danse contemporaine. C'est dans une ambiance groovy, rythmée et cartoonesque où s'enchaînent techniques à couper le souffle et défis insolites que ces deux artistes vous entraînent. Proposant sur scène une jonglerie de haut niveau mêlée à des situations burlesques et décalées. Du beau, du fun... du Groove !

Jeu : Pierre Ledoux et Camille Grappin

Tout public.  
Durée : 45 min.

Ce spectacle n'est pas inclus dans notre formule d'abonnement.

TU : 9 €

**ARVEST DIABOLO KOROLLET,  
OUESK & CHIN**

"ALLEZ ÇA PART !" Levezonoù liessevenadurel koulz ha klask lakaat traoù war-wel en ur mod nevez, sed aze perzhioù « Allez ça part ! » ma vez mesket an diabolo, an troioù-ouesk, an Hip-Hop hag an dañs a vremañ. Kaset e vezer gant an daou arzour da splujañ en un aergelc'h groovy ha lusket, doare cartoon gantañ, ma weler teknikoù hep o far ha daeoù dic'hortoz an eil re da-heul ar re all. War al leurenn e vez janglet en ul live uhel hag en em gavout a reer er gant degouezhioù chin ha dic'hortoz war un dro. Kaer, farsus... Groovy !

C'hoari : Pierre Ledoux ha Camille Grappin

Evit an holl.  
Pad : 45 mn.

N'emañ ket an arvest-mañ e-barzh hor formulenn goumanantiñ.

PU : 9 €

**DIMANCHE 14 DÉCEMBRE  
SUL 14 A VIZ KERZU**

## **MONSIEUR CHASSE**

**JEAN-PIERRE CASTALDI, OLIVIER LEJEUNE,  
LYDIE MULLER, CLAIRE CONTY,  
XAVIER VITON, DIDIER CLAVEAU**

17H00 / 5E00  
AMPHI / ANFI



## THÉÂTRE

C'est bien à une partie de chasse, dans tous les sens du terme, que nous convie Feydeau dans ce vaudeville décapant, qui avec peu de personnages crée un maximum de situations burlesques et désopilantes. Profitant du départ de son ami Duchotel (Jean-Pierre Castaldi) pour une partie de chasse, Moricet (Olivier Lejeune) courtise sa femme Léontine (Lydie Muller). Celle-ci commence par se refuser, sauf si elle découvrirait être elle-même trompée, ce qui ne manque pas d'arriver... Tous vont alors se retrouver à la même adresse sous le toit de la Comtesse Latour (Claire Conty): au 40 rue d'Athènes...

Monsieur chasse ! C'est le vaudeville des vaudevilles qui a rendu son auteur célèbre, c'est d'ailleurs la pièce préférée de Feydeau lui-même. On y retrouve ce déchaînement de situations impossibles qui mélangent mari, femme, maîtresse, amant, voisins... et qui vaudront à Feydeau, jamais égalé dans cet exercice, les qualifications « d'ingénieur du rire » et « d'horloger de génie ».

Une comédie de Georges Feydeau  
Adaptation : Arnaud Cermolacce & Anthony Marty  
Mise en scène : Anthony Marty

Tout public.  
Durée : 1h30.

TE: 20 € / TA: 28 € /  
TR: 30€ / TP: 33€

[www.monsieurtheatre.fr](http://www.monsieurtheatre.fr)

## C'HOARIVA

Gant Feydeau e vezer pedet d'ur gwir abadenn chase e ster leun an droienn, en ur pezh vaudeville dic'h ortoz, ennañ nebeut a dudenoù hag a bep seurt degouezhioù fentus ha souezhus koulskoude. Pa'z a e vignon Duchotel kuit (Jean-Pierre Castaldi) d'un abadenn chase e ra Moricet (Olivier Lejeune) al lez d'e wreg Léontine (Lydie Muller). Ne fell ket dezhi asantiñ da gentañ, nemet ha dont a rafe da c'houzout en em vank he gwaz ivez, ar pezh a c'hoarvezo, sur... En em gavout a ra an holl neuze er memes chomlec'h e ti ar Gontez Latour (Claire Conty) : er 40 straed Atena...

Monsieur chasse ! Pimpatrom ar vaudeville eo, an hini a daolas brud war anv e skrivagner, ha pezh-c'hoari muiañ karet Feydeau e-unan e oa. En em gavout a ra un aridennad degouezhioù fall an eil diwar egile etre ar gwaz, ar wreg, ar wreg hag ar gwaz kleiz, an amezeien... ha gant-se e voe graet « ijinour ar c'hoarzh » hag « orolajer an ijin » eus Feydeau, pa n'eus ket par dezhañ.

Ur gomedien gant Georges Feydeau  
Kempennet gant : Arnaud Cermolacce ha Anthony Marty  
Leurenañ : Anthony Marty

Evit an holl.  
Pad : 1e30.

PB: 20 € / PK: 28 € /  
PD: 30 € / PL: 33 €

**DIMANCHE 18 JANVIER  
SUL 18 A VIZ GENVER**

**FREEDOM  
LYV'N'KO CABARET**

10H30 / 10E30  
AMPHI / AÑFI



**CABARET**

Plongez dans un univers où l'art, la danse, la musique et le spectacle se rencontrent pour célébrer la liberté sous toutes ses formes. «Freedom», la nouvelle création audacieuse de la compagnie Lyv'n'ko Cabaret, vous invite à un voyage à travers des numéros de cabaret, des chorégraphies percutantes et des tableaux visuels surprenants. Les artistes de la compagnie, reconnus pour leur audace et leur originalité, fusionnent des styles variés - du cabaret classique à la danse contemporaine, en passant par des influences musicales internationales - pour donner naissance à un spectacle unique, vibrant d'émotion et de créativité.

Organisation : Ville de Carhaix

Durée : 1h30

Ce spectacle n'est pas inclus dans notre formule d'abonnement.

TU: 5 € / - 12 ANS: GRATUIT  
BILLETTERIE EN VENTE SUR  
PLACE UNIQUEMENT

<https://lyvko.fr>

**KABARED**

Soubañ en ur bed ma kej an arzoù, an dañsoù, ar sonerezhioù hag an arvestoù,

abalamour da lidañ ar frankiz e kement doare a zo dezhi. "Freedom" eo an abadenn hardizh nevez-krouet gant ar gompagnunezh Lyv'n'ko Cabaret. Kouviet e vezer ganti da veajiñ dre abadennoù kabared, korolloù nerzhus ha taolennoù souezhus da welet. Anavezet eo arzourien ar gompagnunezh evit o abadennoù hardizh ha digustum. Ar wech-mañ e veskont stiloù a bep seurt - ar gabared klasel hag an dañs a vremañ, hag ivez sonerezhioù eus ar bed - evit reiñ buhez d'un arvest hep par, leun a fromoù hag a gavadennoù.

Aozet gant : Ti-kêr Karaez

Pad : 1e30

N'emañ ket an arvest-mañ e-barzh hor formulenn goumanantiñ.

PU: 5 € / - 12 VLOAZ: DIGOUST  
BILHEDOÙ E GWERZH WAR  
AL LEC'H HEPKEN

SAMEDI 31 JANVIER  
SADORN 31 A VIZ GENVER

## POHERMUZIK #15

14H00-21H00 / 2E00-9E00  
ESPACE GLENMOR / LEURENN GLENMOR



## LA MUSIQUE DANS TOUS SES ÉTATS

Dans une ambiance conviviale et festive, les professeurs et élèves musiciens de l'école de musique du Poher, et une formation issue des studios de répétition du CLAJ se produiront sur différentes scènes de l'Espace Glenmor. Découvrez des répertoires variés allant des musiques classiques aux musiques amplifiées, en passant par les musiques traditionnelles...

Tout public.  
Partenariat Espace Glenmor,  
École de musique du Poher, CLAJ.

GRATUIT

<http://musique.poher.bzh>

## AR SONEREZH A-HED HAG A-DREUZ

En un aergelc'h plijus ha festus e vo ar gelennerien hag ar skolidi sonerien eus Skol sonerezh ar Poc'hêr, hag ur strollad hag a zeuy eus studioioù pleustrîñ an SDAY, o seniñ war meur a leurenn el Leurenn Glenmor. Grit anaoudegezh gant tonioù liesseurt, eus ar sonerezh klasel d'ar sonerezh amplaet, pe c'hoazh dre ar sonerezh hengounel...

Evit an holl.  
Kenlabour gant al Leurenn Glenmor,  
Skol sonerezh ar Poc'hêr hag an SDAY.

DIGOUST

JEUDI 5 FÉVRIER  
YAOU 5 A VIZ C'HWEVRER

**AMALIA**  
LA CIE. DES XYLOPHAGES

10H30 & 14H30 / 10E30 HA 2E30  
AMPHI / ANFI



© Meng Phu

## DUO DÉ-CONCERTANT

Le duo dé-concertant formé par Ariane Issartel et Lili Aymonino défend une approche de la musique savante non pas comme une musique-musée, mais comme une musique vivante, grâce à des arrangements, ou plutôt des dérangements du répertoire baroque, traditionnel et moderne. Dans ce conte musical original, le duo complice aborde les pièces classiques d'inspiration populaire en bousculant avec brio les codes du récital.

Mais les deux musiciennes espiègles et intrépides ne s'arrêtent pas là et s'attachent à casser les codes mêmes du conte, avec une héroïne au caractère bien trempé qui se détourne du chemin tout tracé la menant au prince charmant. Alors qu'Amalia est abandonnée par son amant et rejetée par sa famille, elles reprennent le contrôle de sa destinée et changent le cours du récit pour inventer une fin alternative, loin des clichés et pleine de surprises. Son aventure drôle et décalée sur les hauts sommets du Máramaros nous est chantée comme l'histoire d'un soir... Découvrez avec Amalia une jeune fille qui ne s'en laissera plus conter !

Partenariat Espace Glenmor, JM France.  
Dès 6 ans.  
Durée : 50 min.

SÉANCES SCOLAIRES,  
SE RENSEIGNER  
AUPRÈS DE NOTRE  
SECRÉTARIAT

## UN DAOUAD DIC'HORTOZ

Un daouad dic'hortoz zo eus Ariane Issartel ha Lili Aymonino, abalamour m'o deus o mod-int da adaozañ kanaouennoù barok, hengounel ha modern. Dezh o n'eo ket ar sonerezh gouiziekl ur muzik-mirdi, unan bev-mat ne lavaromp ket. Savet ez eus bet ur gontadenn-sonerezh nevez gant an div gamaladez. Daoust ma adkaver enni an oberennoù klasel a zo bet awenet gant marvailhoù-pobl e torrout gizioù ar muzik-se gant eurvad.

An div sonerez a ya pelloc'h ganti zoken, hardizh hag abil ma'z int : terriñ a reont ivez gizioù ar c'hontadennoù gant ur penn kalet a harozez. Honnezh a ra he soñj chom hep mont gant ar blanedenn a zo tonket dezhi, da lavaret eo mont da-gaout ur priñs dudius. Goude ma oa bet dilezet Amalia gant he dous hag argaset gant he familh, e teuont a-benn da vezañ mestr war o zonkadur adarre. Cheñch a reont an danevell anezhañ war un dro, betek kavout un dibenn dic'hortoz, pell diouzh ar c'hlichedoù ha leun a souezhadennoù. O avantur fentus ha dic'hortoz a gas ac'hanomp betek leinoù Máramaros, a vez kanet deomp evel un istor ha ne bad ket pelloc'h eget un nozvezh... Deuit d'ober anaoudegezh gant Amalia, ur plac'h yaouank ha ne vo ket kontet kantikoù dezhi biken ken !

Kenlabour gant al Leurenn Glenmor ha JM France.  
Adalek 6 vloaz.  
Pad : 50 min.

ABADENNOÙ  
EVIT AR SKOLIOÙ,  
GOULENN GANT HOR  
SEKRETOURIEZH

[www.jmfrance.org](http://www.jmfrance.org)

SAMEDI 21 FÉVRIER  
SADORN 21 A VIZ C'HWEVRER

**CARMEN ET BOLÉRO**  
GRAND BALLET DE KIEV  
LAZ-KOROLL MEUR KYIV

20H00 / 8E00  
AMPHI / ANFI



© Meng Phu

## DANSE CLASSIQUE

Un seul spectacle pour deux œuvres majeures : Carmen et le Boléro de Ravel, deux compositeurs Bizet et Ravel. Deux œuvres qui se font écho.

Carmen, ce ballet mythique, incarne une parfaite harmonie entre la grande danse classique et la danse de caractère. Reconnue comme l'œuvre la plus jouée au monde, elle traverse les époques sans perdre de sa puissance dramatique. Carmen, femme solaire, s'élance avec fougue dans une quête d'amour effrénée. La jupe virevoltante et les cheveux emportés par le vent, elle vit avec passion et paie cet élan de liberté au prix de sa vie. Jusqu'au dernier souffle, elle fait face à la mort avec une bravoure saisissante.

« Je n'ai écrit qu'un seul chef-d'œuvre », affirmait Maurice Ravel, et c'est le Boléro. Dès les premières notes, cette œuvre obsédante s'imprime dans l'esprit, portée par un crescendo envoûtant qui nous berce sans relâche. Ce principe de composition, à la fois simple et audacieux, a conféré au Boléro une place unique dans le répertoire musical. Aujourd'hui encore, il demeure l'une des créations les plus fascinantes et les plus universellement aimées au monde.

Coréalisation Espace Glenmor, NP Spectacles.

Tout public.

Durée : 1h50 avec entracte.

TA: 25 € / TR : 27 € /  
TP: 30 €

## DAÑS KLASSEL

Un abadenn hepken evit div oberenn veur : Carmen ha Bolero Ravel, gant an daou sonaozer, Bizet ha Ravel. Div oberenn hag a zegas da soñj an eil eus eben.

Carmen, ar gorolladeg brudet-meurbet, a laka klotañ tre-ha-tre an dañs klasel gant an dañs a garakter. Treuziñ a ra ar mareoù hep koll he galloud dramaek an disterañ, hag hiziv an deiz eo an oberenn a vez sonet ar muiañ er bed a-bezh. Carmen, ur vaouez skedus he fersonelezh, gant he brozh o troidellañ hag he blev a-fuilh gant an avel. En em ouestlañ a ra gant entan d'ur c'hlask karantez diroll. Bevañ a ra hervez he froudenn, lusket gant he frankiz, daoust ma vo diwar-goust he buhez a-benn ar fin. Un estlamm eo gwelet penaos e tal ouzh ar marv gant kalonegezh betek hec'h analad diwezhañ.

« Ne'm eus skrivet nemet ur bennoberenn », eme Maurice Ravel, hag ar Bolero an hini eo. Adal an notennoù kentañ ez a an oberenn sorc'hennus-mañ don-tre e spered an dud. Goude ez a war greñvaat, en ur strobinañ hag en ur luskellat ac'hanomp dibaouez. Simpl ha nevezus war un dro eo ar mod ma oa bet aozet e oberenn gant Ravel, hag an hentenn-se zo pennkaoz en deus kavet ar Bolero e blas dezhañ e-unan en doniaoueg. Hiziv an deiz c'hoazh e chom unan eus ar c'hrouidigezhioù boemusañ, hag unan eus ar re muiañ-karet er bed-holl.

Kensevenet gant al Leurenn Glenmor hag NP Spectacles. Evit an holl.

Pad : 1e50 gant un ehan-c'hoari.

PK: 25 € / PD: 27 € /  
PL: 30 €

[www.np-spectacle.com](http://www.np-spectacle.com)

VENDREDI 6 MARS  
GWENER 6 A VIZ MEURZH  
**REBECCA ROGER CRUZ**

20H30 / 8E30  
AMPHI / AÑFI



## ONIRISME VÉNÉZUÉLIEN

Née à Caracas, la chanteuse et percussionniste Rebecca Roger Cruz déploie un paysage unique à la confluence des musiques anciennes, traditionnelles, collectives et improvisées. Percussions (afro) vénézuéliennes, rites ancestraux du Barlovento (au nord du Venezuela), chanson populaire latino-américaine, répertoire baroque, lyrique, jazz, rock ou flamenco... Autant d'influences qui, sédimentées par une pratique-fleuve, donnent corps à sa singularité. Au delta de tout ce qui la constitue, entourée de quatre musiciens d'exception, Rebecca Roger Cruz dévoile aujourd'hui son premier album solo, après avoir déjà brillé au sein des groupes AA'IN, Parranda La Cruz ou MAAAR. De sa voix métamorphe, elle caracole de chants d'oiseaux en incantations poétiques imprégnées de réalisme magique, expérimentant avec les sources et les textures du son. Profondément liée aux éléments, la musicienne sur scène invite graines, cordes et bambous à sa transe percussive, orchestrant une cérémonie live d'où sourdent les forces de la nature. Frissons assurés !

Chant, percussions : Rebecca Roger Cruz  
Violon, chœurs : Sylvain Rabourdin  
Violoncelle, chœurs : Léonore Grollemund  
Contrebasse : Léna Aubert  
Percussions, chœurs, chant diphonique : Juri Caneiro

Coréalisation Espace Glenmor, Le Plancher.  
Tout public.  
Durée : 1h30.

[www.facebook.com/beccarogercruz](http://www.facebook.com/beccarogercruz)

PB: 8 € / PK: 13 € /  
PD: 15 € / PL: 18 €

TE: 8 € / TA: 13 € /  
TR: 15 € / TP: 18 €

## HUNVREOÙ EUS VENEZUELA

E Caracas eo bet ganet ar ganerez ha taboulinerez Rebecca Roger Cruz. Gant he muzik e tispak ur bed hep par ma kej ar sonerezhioù kozh, hengounel, c'hoariet a-stroll ha war ar prim. Meur a levezon a glevet mesk-ha-mesk : binvioù tos (afro) venezuelat, lidoù hengounel eus Barlovento (en hanternoz Venezuela), kanaouennoù-pobl latinamerikan, tonioù barok, lourennek, jazz, rock ha flamenko... Bodet e vezont-holl gant ampartiz an arzouez, a oar stummañ ur sonerezh dezhi hec'h-unan. Diwar meskañ ar sonerezhioù disheñvel-se he deus savet Rebecca Roger Cruz he fladenn gentañ. Goude bezañ tapet brud gant ar strolladoù AA'IN, Parranda La Cruz pe MAAAR e ro da glevet an tonioù nevez-se, asambles gant pevar soner donezonet-bras. Gant he mouezh liesdoare e tremen eus ar c'hanoù laboused d'ar breoù barzhel, a zo warno merkoù ar realouriezh-hud, en ur glask c'hoari gant mammennoù ha teksturioù ar son. Liammet start eo ar sonerez venezuelat ouzh an natur : kerdin ha bambouz a implij pa vez o seniñ live war al leurenn, e barr an trañs gant he zaboulinoù, aet da vestrez ul lid ma sourr nerzhioù an natur. Kridiennoù a zegaso deoc'h a-dra-sur !

Kan, binvioù-tos : Rebecca Roger Cruz  
Violoñs, diskan : Sylvain Rabourdin  
Violoñsel, diskan : Léonore Grollemund  
Gourvioloñs : Léna Aubert  
Binvioù-tos, diskan, kan difonek : Juri Caneiro

Kensevenet gant al Leurenn Glenmor ha Le Plancher.  
Evit an holl.  
Pad : 1e30.

VENREDI 20 MARS  
GWENER 20 A VIZ MEURZH

## BREIZHAROCK

20H30 / 8E30  
AMPHI / ANFI



## MÉLANGE DÉTONNANT DE ROCK ET DE MUSIQUE CELTIQUE

Breizharock, c'est cette musique qui chatouille les pieds, donne envie de bouger les jambes, de claquer très haut des mains... mais surtout, c'est celle qui fait vibrer le cœur.

Le chant de la cornemuse se mêle aux chorus endiablés de la guitare électrique, aux nappes déchaînées du clavier et à ses différents grooves. Cette alchimie ne serait pas complète sans un pont reliant ces univers musicaux ; la basse et la batterie forment le lien essentiel à ces rythmiques très similaires.

